

Modèle CCYC : ©DNE

Nom de famille (naissance) :


(Suivi s'il y a lieu, du nom d'usage)

Prénom(s) :

N° candidat : N° d'inscription :

(Les numéros figurent sur la convocation.)

Né(e) le : / /



1.1

ÉVALUATION COMMUNE

CLASSE : Première

VOIE : Générale Technologique Toutes voies (LV)

ENSEIGNEMENT : breton

DURÉE DE L'ÉPREUVE : 1h30

Niveaux visés (LV) : LVA **B1-B2** LVB **A2-B1**

Axes de programme : **Axe 6 « Innovations scientifiques et responsabilité »**

CALCULATRICE AUTORISÉE : Oui Non

DICTIONNAIRE AUTORISÉ : Oui Non

Ce sujet contient des parties à rendre par le candidat avec sa copie. De ce fait, il ne peut être dupliqué et doit être imprimé pour chaque candidat afin d'assurer ensuite sa bonne numérisation.

Ce sujet intègre des éléments en couleur. S'il est choisi par l'équipe pédagogique, il est nécessaire que chaque élève dispose d'une impression en couleur.

Ce sujet contient des pièces jointes de type audio ou vidéo qu'il faudra télécharger et jouer le jour de l'épreuve.

Nombre total de pages : 4

Baccalauréat général et technologique
Langues vivantes régionales - Breton

Classe de première

Epreuve 2 : Compréhension de l'écrit et expression écrite
(3^e trimestre)

<u>Niveau visé</u> LVB : A2-B1	<u>Durée de l'épreuve</u> 1 h 30	<u>Barème 20 points</u> CE : 10 points EE : 10 points
---	---	--

L'ensemble du sujet porte sur l'axe 6 du programme : **Innovations scientifiques et responsabilité**

Il s'organise en deux parties :

- 1- Compréhension de l'écrit**
- 2- Expression écrite**

Vous disposez d'**une heure trente** pour prendre connaissance de l'intégralité du dossier et pour traiter la compréhension de l'écrit (partie 1) et le sujet d'expression écrite (partie 2) **en breton**.

Hañv du al lanv du

« Just a-raok Pask 1978 e oan o paouez digeriñ an otel ; nullet e oa bet an holl rezervationoù abalamour d'al lanv du, eme Brigitte a dalc'he un otel e Trebeurden. A bep tu war an hent, e-tal ar mor, e oa kamionoù an arme, un aergelc'h brezel a oa. » Peñse an Amoco Cadiz a oa c'hoarvezet d'ar 16 aviz Meurzh e-tal Porsal. D'an 22 e tegouezhe an eoul-maen war aodoù bro-Dreger.

Daoust d'ar strivoù evit naetaat an aod, a-wezhioù gant doareoù spontus evit an endro naturel, ne oa ket deuet touristed an estrenvro da hañviñ. Ar re a oa boas da zont o doa berraet o frantad vakañsoù. Brigitte ne oa ket bet aotreet gant ar prefeti da serriñ he stal. Deuet e oa a-benn da gempouezañ he c'hontoù o tegemer gwraez ar soudarded, tud a youl vat deuet da naetaat an aodoù, ha zoken skipailh teknik ur film arc'hantaet gant Marcel Dassault. « Kalz a douristed a deue evit chevreta, ha bloavezh an Amoco e oa bet kalz dioute, a gont al letiourez. Koulskoude ne c'halled ket debriñ o fennoù. Da'm meno, hiriv an deiz ne vije ket bet aotreet chevreta. »

Oc'h echuiñ he zezenn douarouriezh e oa Odile d'ar c'houlz-se. Diouzhtu he doa klasket saveteiñ morvrini saotret gant mazout. Gant he bag vihan, he c'heflusker yenaet gant aer ha n'eo ket gant dour mor, he doa dastumet tri-ugent evn ; un hanter-kant bennak anezhe a oa bet paret ha dieubet e bae ar Somme. 220 00 tonennad eoul-maen a oa e-barzh al lestr aet d'ar strad. Ar reier a oa bet naetaet gant dour tomm dre Gärcher pe

zoken gant skurieroù¹. « Ar prezidant a lâre e vefe propr pep tra a-raok an deiz kentañ a viz Gouere, emezi. Kalz pelloc'h e oa bet an natur oc'h adkavout he stad kent el lec'hioù ma oa taolet skurieroù. »

Ar vezhinerien, ar besketourien, ar vagerien istr n'hallent ket gounit o zamm bara ken. Ret e oa gwareziñ ekonomiezh an douristezlezh. Bruderezh a voe graet evit kendrec'hiñ ar Frañsizien da zont da vakañsiñ daoust d'al lanv du. Patrick a laboure en ur stal kartennoù-post : « Profet e oa bet deomp paper ha moulet hon boa ugent mil poster evit netra, evit broudañ an douristed da zont, emezañ. Met nac'het hon boa ober kartennoù skeudenn an Amoco warne, ur vezh e vefe bet gounit arc'hant e-mod-se. »

E Perroz-Gireg, lec'h ma oa Pierre eil maer karget eus an douristed, e oa bet savet un hotline pellgomz evit kelaouiñ an dud diwar-benn stad an traezhennoù. Kemeret en doa perzh ivez e stourm bras dilennidi Breizh a c'houlenne bezañ digollet eus ar peñse. Nav bloaz goude peñse an Torrey Canyon (1967) e oa kresket ar fulor. Gant lanv du an Tanio e 1980 e oa bet peurgendrec'het kumunioù ha departamantoù Aodoù an Arvor ha Penn ar Bed da stourm a-unvouezh betek goulenn kontoù digant ar gompagnunezh Amoco e lez varn Chicago. E 1992 e oa bet digollet gouzañverien ul lanv du evit ar wech kentañ en istor.

Diwar Stéphanie Stoll, *Côtes d'Armor Magazine*, miz Here 2018

1. Compréhension de l'écrit (10 points)

Respontit e brezhoneg d'ar goulennoù amañ war-lerc'h :

Eus petra zo kaoz en destenn-mañ ?

Penaos e c'hell bezañ liammet ouzh an danvez-studi « An araokadennoù skiantel hag ar giriegezh » ?

1 Skurier : *détergent*

2. Expression écrite (10 points)

Respontit e brezhoneg da unan eus an daou c'houlenn amañ war-lerc'h.

Savit ur pennad-skrid a 120 ger d'an nebeutañ.

Goulenn A

Kazetenner(-ez) oc'h, bet o sevel goulennoù ouzh bezhinerien ha pesketourien goude peñse an Amoco Cadiz. Savit ar pennad kazetenn.

Goulenn B

Goude peñse an Amoco Cadiz o doa kalz tud klasket saveteiñ laboused ha naetaat an aodoù saotret gant mazout. Ha prest e vefec'h d'ober memestra ma vefe ul lanv du adarre ?